

KIS-400 – Adanv ha pennanv adanvaet.

(GE – 08 07 91)

E KIS-395, pp.), e tisplegen ez eus meur a hent da strishaat erdal ur pennanv, dre ober gant :

- a) ur rakger, sk. *henvrezhoneg* ;
- b) ur renadenn anv (pe pennanv adanvaet), sk. : *brezhoneg Leon* ;
- c) un adanv, sk. : *brezhoneg arnevez*.

An dibab etre an tri hent ne lez peurliesañ gant ar yezher lec'h ebet d'an amzivin. Degouezhioù zo avat ma termer, da skouer pa vez an adanv deveret diwar ur pennanv. Kemeromp an div c'herienn : *barregezhioù korf*, – *barregezhioù korfel*. Ul lod kaer eus ar yezherion a gavo gwell hounnezh eget houmañ. Ned eo ket euver ensellout abegoù o dibab :

I. – Reoù 'zo a lavaro o deus heuliet “ijin ar yezh”.

II. – Reoù all a roy da arguzenn o damant da skañved en o frezeg.

I. – Gwall alies e vez “ijin ar yezh” skoed ar re nad int ket mennet, pe gouest, da ren un dezrann. Anzavomp neoazh e chom d'ober an dezrann a yezhoniezh war ar pennanvioù adanvaet e brezhoneg. Evit a sell arver an adanvioù dre *-el* avat, ez eus bet savet meur a studienn¹ ; ni oar ez int binvioù da wezhiañ war erdal ar pennanvioù : er c'herienn *barregezhioù korfel*, e talvez *korfel* da strishaat erdal *barregezhioù*.

Hogen, ret eo pouezañ war gement-se, seurt gwezhiañ war an erdal a amplex pleustr ar goubarañ, eleze un devezout dre ar yezh, un hengoun a breder a-dreuz d'ar remziadoù yezherion. E Breizh siwazh, a-hed ar c'hantvedoù, kerkent ha ma veze anv da ren un imbourc'h kefredel, ez aed ingal dre al latin pe ar galleg. Goubarzhegezh dispered eo enta goleiñ deol gant banniel “ijin ar yezh“ distuziadur ur yezh dilezet ur milved pad gant an devezourion.

¹ Sl. VALL., xvij-xviii ; KIS-093, La-05, pp. 68 hh.

II. – Bezet pe vezet, hag eñ frouezh d'an distuziadur pe d'ur genezh brezhonek, emañ arver ar pennanvioù adanvaet e kerz ar vrezhonegerion. Hag ur binvidigezh e vez, ac'hoel mar gouzer ober anezhañ ur benveg gramadegel perzhek – ha n'eo ket an arver unel rediek a wel ennañ dalc'hiaded relijion an teodyezhoù.

Hep mar, en un darn vat eus an degouezhioù, e vez ingal ober gant *barregezhioù korf* pe gant *barregezhioù korfel*, nemet ez eo krennoc'h ar c'herienn gentañ. E troioù 'zo neoazh e vez strishoc'h an dibab : diaes e ve lavarout estreget : “*barregezhioù korfel, bredel hag arc'hwelel*”, evel a lenner e KIS-399, p. .

Sellomp a-dostoc'h ouzh ar c'herienn emaoimp o paouez menegiñ. Dre ur reiz laosk hepken ez intentfed *barregezhioù korfel* evel “barregezhioù ar c'horf”. Kempleshoc'h ar c'heñver etre an ergorenoù arouezet gant ar pennanv hag an adanv, pa'z eo ster dik an termen “barregezhioù an den evit a sell e gorf” ; a-du-rall, emañ arveret *korfel* a-gevenep da *bredel*, an adanv-mañ oc'h entalañ ur c'heñver ken kemplezh all evel a welimp pelloc'h. *Barregezhioù korfel* ha *barregezhioù korf* o vezañ kenarver e yezh ar pemdez, e tibaber hemañ mar buker da skañved ar prezeg keit ma ne sav ket forc'hellegezh ; hennezh a rankor dibab avat diwar ma vennor fest ezlakaat ar c'hemeradur “barregezhioù ar c'horf”.

Troomp bremañ ouzh ar c'herienn *barregezhioù bred*. An damant d'al louer a zougfe marteze ar yezher da lavarout kentoc'h : *barregezhioù bred*. Arguzenn doull, rak pell emañ ar bred a vezañ louer : ur c'heal ersezat, silwink hag andespizadus, n'eus ken anezhañ, kalvezet en 19^t kantved hag arveret dalc'hmat ; a dra sur n'eo ket goubarekoc'h an adanv *bredel* eget ar pennanv *bred* – louerekoc'h e ve zoken pa c'hoarvez dezhañ skritellañ realioù louer endra vez bepred ar pennanv *bred* oc'h aroueziñ un hollekadur diwarno. Greomp gant *barregezhioù bred* enta, dre zamant d'ar verded, ya met n'eo ket dre garantez an termenoù louerek. Evit distreiñ d'ar c'herienn diagent, merzhomp ez eo ar C'HORF a zave *korfel* dezhañ ur goubarad ivez diwar ar c'horf anadennel, eleze ne glot ket ouzh “keal kraï” ar c'horf evel m'en merzher war-eeun, met ouzh ur c'heal “pleusket” diwar-bouez ar goulun damkanel m'en intenter evel ur blein a-gevenep d'ar blein all ez eo ar bred (a-du-rall, da nerzhañ ar geveneped, er Vredoniezh da skouer, e reer gant *kreud, kreudel* a-dal da *bred, bredel*).

Erfin, mar kemeromp an trede gerienn : *barregezhioù arc'hwelel*, e kejer ivez gant kealioù goubarek. Savelet eo bet keal an “arc'hwel” dre un hent heñvel ouzh an hini a zisoc'has gant keal ar “bred”, ha seul zidennoc'h ma'z eo, ent strizh, ar bred ur gennad eus arc'hwelioù ar bevedeg. Hollek kenan eo keal an arc'hwel : n'eus a geal hollekoc'h egetañ nemet hini ar “beved”, en erdal hemañ daou c'hennad : an “organoù”

hag an “arc'hwelioù” end-eeun. Intent a reer enta *arc'hwelel* a-gevenep da *organel* hervez an hevelep disparti o kevenebñ *bredel* ha *korfel* (pe *kreudel*, er Vredoniezh). Ar c'herienn *barregezhioù arc'hwelel* a intenter evel “barregezhioù an den evit a sell e arc'hwelioù daremprediñ”. E dedro lavar ar Vezekniezh ez eus c'hoarvezet un divellekaat e par ar c'herienn-mañ : ezvevennet eo bet keal an arc'hwelioù struzhel (Gl. "fonctions végétatives") e gounid keal an arc'hwelioù daremprediñ (Gl. "fonctions de relation") hep-mui. Ken e ve dic'hallus mont amañ dre ur pennanv adanvaet : *barregezhioù arc'hwel(ioù)* a rafe d'an intent kouezhañ re bell diouzh ar ster ambredet.

Merkañ a reomp e c'hoari amañ an damant d'ar skañvded war an tu gin d'ar skouerioù kentañ roet : mard eo *barregezhioù korf*, *bred* krennoc'h eget *barregezhioù korfel*, *bredel* (ha c'hoazh ne c'haller ket lavarout ez eo bras an disamm !), e ranker mont dre an dezgeriadenn *barregezhioù korfel*, *bredel hag arc'hwelel* evit kaout ul lavar berr ha fraezh.